

DA ZANT BREVALAR, ABBAD

PATRON KERLOUAN

Meuleudi ha Peden



Ton : Lambader.

DISKAN :

*Kanomp henor a greiz kalon
Da zant Brevalar, hor Patron,
Ha pedomp holl ma kendalc'ho
Da skuilh e pennoz war hor bro. } bis*

1.

O sant Brevalar, c'houi zo bet
Gant tud Kerlouan henoret
Raktal ma teuas dreist ar mor
Brud ho santelez d'hon Arvor.

2.

Hon tadou koz o tont er vro
Euz a Vreiz-Veur oa deut ganto
Karantez gwirion d'an holl zent
O doa henoret diagent.

3.

Abaoue-ze Kerlouaniz
O deuz kendalc'het e peb giz
D'ho pedi, 'vel o Fatron mat,
D'ho meuli, d'ho trugarekat.

4.

Gouzout a reomp, pa oec'h ganet,
War divez ar pemped kantved,
Ar feiz a zanke grizioù doun
En Enez-C'hlaaz, an Iverzoun.

5.

Ni oar e skol ar barz, ho tad,
Abred c'houi zo bet desket mat
Da garet Doue dreist peb tra
Ha d'e veuli en eur gana.

6.

Pa zit dre vor da vro Kymri
Da Lankarvan, en Abati,
Ni'ho kwel eno noz ha deiz
O teski lezen zakr ar feiz.

7.

Dre labour, studi ha peden,
Dre vuhez rust a binijen,
E savit uheloc'h bembdez
War bazennou ar zantelez.

8.

Oh ! grit ma vo en hor parrez
Douget atao peb tiegez
Da zevel da Zoue, hon Tad
Bugale fur, bugale vat.

9.

Ha grit ma ouezint holl goude
Oc'h heul bepred lezen Doue
Evel doc'h hag o zadou koz
Kerzel war hent ar baradoz.

10.

Karget da ren an Abati
C'houi verk an hent d'ho sujidi.
Entana 'rit o c'halonou
Kement dre skouer ha dre gomzou.

11.

Nag a bed sant o peuz eno
Savet d'ober henor d'o bro
Henor ivez d'ar feiz kristen
A skignent dre an enezen ?

12.

Pa zit ganto d'an Enizi,
Da bell, etouez ar gouezidi,
Daoust ha ne verkit ket an hent
Da glaskourien ar mor divent ?

13.

Pa deuit betek Sant-Malo,
E Breiz vihan, d'ober eun dro,
Nag ho kalon a drid laouen
Dirak labour ho tiskibien !

14.

Mil bennoz d'eoc'h, Abbad santel !
Adet o deuz, e Breiz Uhel,
Ar feiz zo deut e Bro-Leon
Gant hor c'herent a vouenn breton.

15.

Mil bennoz d'eoc'h ! Ha ra vezo
E Breiz a-bez, karet atao
Hor Mestr ha Salver Jesus-Krist
Hag hor Mamm zantel an Iliz.

16.

Distroet goude d'ho pro goz
En Iverzon, c'houi, deiz ha noz,
O peuz gouezet, en eur goza,
Karet Doue muioc'h-muia.

17.

Ha setu c'houi breman en nenv
O tifen dirak tron Doue,
Etouez kristenien Breiz-Vihan,
Ho pugale a Gerlouan.

18.

Plijet ganeoc'h mirat bepred
Da gouerien, martoloded,
Da gement den a gar poania
Yec'hed da c'hounid e vara.

19.

Lakit da ren en hor parrez
Ar peoc'h hag an unvaniez,
Ar garantez, kountet atao
Talvoudusa tenzor eur vro.

20.

Ha goude poaniou ar bed-man
Grit d'eomp mont eun deiz da danva
Gant Jezus hag e Vamm zantel
Dudi ar vuhez eternal.



AOTRE DA VOULA :

Kemper, 31 a viz Kerzu 1947.

J. CADIOU, *Vikel bras.*